

CHANSON NEVEZ

Var sujet ann everezet.

- Breman pa hon dizourci, ha caout eun tam amzer,
 Eman echuet ann east, ha laquet er sollier,
 Eman deut barz ma speret da gompozi eur son,
 War sujet ar graguez ha demez ar c'hanton.
- Ewar sujet ar graguez, hac ar merc'het yaouanq,
 Pere a zo accoutumet da ewa gwinn-ardant,
 Da ewa cafe ha gwinn-gwen, ha tassadou gwinn-ru,
 Odivi, cognac ha liqueur hac ive cafe du.
- Mez eur wreg accoutumet da ewa odivi,
 Obliget ha vo he goaz da zivoal deuz onti,
 Da divoal onti atc'houez ar prez pehini man an arc'hant,
 Ewit empech anezi da gaout pa no c'hoant.
- Mez eur wreg en deuz adrez hac ha rayou troyou,
 Ha ray eun tol laquet d'ar goaz, ha netra na vouiou,
 En peb mare deuz ar zun he tigouez ha miliner;
 Dre eun devez mad he zoc'h deut ne man quet Yan er guer.
- Neuze e pignont bars er gamp, da gargan eur sahat,
 Mar plich ganec'h miliner en casse din d'ar marhat,
 Mez mo avertis miliner ho rog ha hefet deuz ma zi,
 Da nonpas laret guir ha leet ha ewo odivi.
- Breman e vo cavet an tu da gaout eun tam arc'hant
 Ha pa vo cavet ar gomer e vezo gwinn-ardant,
 De bonjour deoc'h ma hommer pel zo meus quet o quelet,
 Domp da glasq peb a vauac'h da dori hon zec'het.
- En eur gontan ho doare ezont dan hostiliri;
 Petra'momp ma hommer, coulz e dimp caout odivi,
 Hema digasso grouez domp ha nerz enn hon izili,
 Me na gavan quet gwel boesson evit an odivi.
- Mez dre forç d'ann ewan et teuont da vewi,
 He commançont pilat, ho bec, ha da zonet hardi,
 Neuze teui stang-ha-stang an demi quart an dro,
 Digass eta hostis, nequet arc'hant a vauquo.
- Deuz quemement den e vo en tyho devont consequanc,
 Mez confusion en devo ann dud en ho fresanc,
 Mez laret ereont on trezo, pa do guetlet ho er,
 A setu ase merc'het, hac eman leun ho soufer.
- Mez pa vent eru leun a voalc'h he teuont war ar ru,
 Mez ne valeont quet plen, branla a reont d'an daou du,
 Unan a lar quenavo poent he dimp mont d'ar guer,
 Mez he bennh-a) ha lavar nie meuz ma foar d'ober.
- He ha meuz hoaz da gaout zaon, roussin ha holer,
 Hac ar butun a zo manquet bars ma zabatieren,
 Antren evelse barz enn ty, da glasq zaon ha roussin,
 Fouillan he ra he godel, mez arc'hant neuz quet quin.
- Mez eur vaouez hardi, pehini deuz quet pridiri,
 Ha pa ve achu he arc'hant ha c'houleu ben credi;

- Mez merc'het ar warc'hadourez dibet, ne wen ambas.
Hac a respontas ractal dezi ebars ne faç.
- C'houi heuz foetet ho arc'hant'barz an hostiliri.
- Ha breman ha peuz an ér da houlen traou enn credi :
Dont era er mas deus an ty, gant eun ér coleret,
Ann ini na nequet hardi a vo ganti spoutet.
- Ober e rei tro ar foar, hep mez, evel-ze,
- Couscoude he renq caout harp'barz ma allo bale,
- A nep confusion he-bet ha rei tro an dachen,
- Mez, en devo li zud ho welet eur sort strouillen.
- Ebarz ma vezo fin d'an de, na guemer na pen na troad,
- Rac ha-ben hi has d'ar gær, vo ret caout eur marc'h mad ;
Ha pa fell dezi parlant emma deut a bill bras,
Passeit ar gallec hac ar latio, na war quet dayantach.
Brud e we hoas deuz ar merc'het hac e ha d'ann ewach douc,
Ha ew woael'h betec mont mew, mez ne reont quet a drouc.
Ar reze da vianna zo agreaploc'h da welet,
Rei a reont da gredi ha wesen seurezel.
- Ar merc'het yaouanc memez tra ebars ann hostiliri,
Gwerennou gante'bars no doro ha leun ha odivi,
Me ha meuz annondeguez war buez ar merc'het,
Kar bet hon bet, ewechou, gante'ho lipet.
- Monet e ran da zisclerian ebars en abrage,
Daru deus ar marvaillon zo c'hoarveet en Guene.
Me am boa choazet da vestrez eur plac'h capabl meurbet,
- A ouar poquet da lost ann tas pa ve ganti carzet.
- Eun devez he-bars ar foar me hem boa hi rencontret.
He-bars en hostiliri me am boa hi saladet,
Salud, bonjour plac'h yaouanc tensor ma amitie,
Contiantamant ma speret objet ma harante.
- Ha doc'h ive den yaouanc, me ho salud ive,
Deut da guemer ho lod ar foar, mar he ho polonte,
Quemerit eur bannac'h liqueur, pe eur bannac'h la goutte,
Quemerit deus ar sort eo ar guelan d'ho cout.
- Ha boë eur pennat amzer hanavecent he zantimant,
Me laras dezi, ar gwin-ardant zo eun dra excellent,
- Ar bannac'h quenta ha ewas ha rez dioutan min fall,
Mez hoant he devoa a-dare da gaout eun all.
Ha me ho houlen ive pep ha vannac'h d'am zro,
- Me na maquet risq ebet, car ma mestrez ha baeo ;
Ma mestrezic ha blich d'hin, ha dreist ann holl verc'het,
Biquen enn he hompagnenez me nam bezo sebet.
- Evet a sort ha garfoc'h emezi ma servicher,
Me-fenos e renko em c'hondui d'ar ger ;
Allaz neuze he teuis da zoujal em memor, em speret,
- Ha cetu aman eun den hac a zo goal dapet.
- Nonobstant da guement ze partial a vo ret,
Mez ma na né quet wit querzet, hi dougen ne rin quet,
- Mez pa voamp deut barz enn awel, hac avancet barz eun hent,
- Pa zispegen diouti he coeze war ann dachen.

- Ar parapluï a zo collet, hac hi zavancher so a scleg,
 - Hac hi houëf ha so chomet a damo hed ann dreiz,
 - Cetu clanw bras ar plac'h paour, na guemer na troad na penn,
 - Ha me zo nehet bras gant ma mestres strouilleun.

- Ya clanw bras eo ma mestrez, nequet quin ewit querzet,
 Ret e din hi lezal war ar n'hent, ha bi laquaat da gousquet.
 Neuze me zenis d'ar guer hac hi lezas enno.
 Pa hi devo cousquet awalc'h, marteze hi difuno.

Guelloc'h we d'ar sort merc'het enn plac'ho sarapluiou,
 - Caout kiri goloet pa hefent d'ar foariou,
 Ha neuze d'ha yibona, ma ne venquet wit querzet,
 - He vesent tolet he barz, hac ha vesent chareet.

Ho hass he vefe proproc'h, car ne vesent quet goëlet,
 Ha quit he vefe ho distlat da vezan habimet,
 - Ha comotoc'h eo ive d'ar re^{ve} deus o ren,
 Car pignat ebars ar har n'ez quet quement a boen.

- Ho pedin ha ran merc'het dre ma zon d'oc'h mignon ;
 Da vezan moderet pa cewt boesson :
 - Car enn eur ewan re, a offancer Doue,
 - Dstrujan a ret bo corf, ha lahan ho hinc.

- Evidon me d'ho quelen me zo ive bambocher,
 Demeus a barez Gourin, hac he chom er *Kerquicher*,
 Me a zo eur paour qez des, gant ann ewach dibochet,
 - Mez ret ew d'hin lezel ma reaq er blaman gant ar merc'het.

- Hac eur vicher fall ew ive evit destum madou,
 - Ret he din mont er blaman da varc'hadour coëffou,
 Entre ar pez a vo uzet hac ar pez a vo roguet.
 - Mar-teze ha deui ha ben, da honnit ma zam boet.



CHANSON

- COMPET A NEVEZ

ETRE AN DEN INTERESSET

HAC AN DEN FENEANT.

Var. eun ton nevez.

- Me sell din implija amzer da gomposi eun disput.
 Hac a rai divertissamaot etoues eun nombr bras a dut,
 Var sujet daou zen er bed man hac a vev en nehamant,
 Uuan a so interesset hac un all a so feneant.

- An bini so stag e galon eus ar madou temporel,
 - Er moment ma souch b'anna e' ret dezan o lesel,
 Ha pa vel e vern o cresqi e zeo contant nos ha de,
 Ha divempra o voasiet evit lacat c'hoas varneze.

Ar feneant ne c'houlen qen nemet ober cherio mad,
- Beza distrouil en e labour hac a gorf hac a dillat ;
- Mar bez gret dezan labourat a enep de santimant,
- An deiz varlec'h e c'hommo er guer da ober e feneant.

E - Petra c'heuz da sourcial demens va oll demarchou,
- Me ne don qet santimantet da vezan mestr da vadou ;
- Va zad ha va mam aroc din n'o deoa qet destumet,
- Me fell din ober evelte pad ma vin war ar bed.

I Gouel ve dit senti ouzin ha chang crenn a zantimant,
Hac ez pe eun tam peadra hac eun nebeut a arc'hant,
- E ves estimet er c'hontre ha contet eur loden vad,
- Ha da vugale var da lerc'h a gaffe eun dra bennac.

E Ma senten eus da avisou, e rafen enn tiegez mad,
Bepret e talc'hin em memor trein va mam ha trein va zad,
A zo bet pel bras assambles, ac a zo ét gant Doue,
- Ha ni yel var o lerc'h pa n'omp lét aroc deze.

I Gouel ve laquat eur beden gant ar re zo decedet,
Evit sellat en o etat entre ma voant var ar bed ;
Me oar ervad pa veomp galvet e recomp apparissa,
- Mes laquet omp da labourat betec hon heur diveza.

E Goude da boan ha da fatig o testum eur bern madou,
E vo an oll o clasq ar saçon da ober dit goal gollou ;
Me vo exant guement-ze pa na moquet dastumet,
Hac e teufen da bröcedi n'em bezo goel goll ebet.

I Ma queres ivanti proces pa ne teus qet a voyen
E yel da gorf da amanti en eur plaç a binigen ;
- Me en eur alumni goulou en em bario bepret
Gant va arc'hant ha va danvez, ha te a vo prisonniet.

Pa vin digen ha disourci em plijadur o repos,
E vi o clasq saout pe guezec a erruo d'an anter-nos,
En eur goler an horruplan euz da vreg ha tud da di,
- Couls e guelet eur serpent en o mesq eguet pa vi.

I Pa vin eus va dol o coania, er penn huellan placet,
E po bara zec'h paillec ha banahou dour bervet,
Ur plajat qic dirazon, d'am zud o tistribui,
- Ha va daoulagad o sellet el lec'h ma plijo din.

E Caër c'heuz clasq da excusou en douar e-ma da blaç,
Goude da boan pa vi maro cete ama da bartac'h,
Pevar blanqen, eur c'hos rochet ar falla vo en ti,
- Eur gos lincel ha hi dresset a yelo da lieni.

I Pa parlantes gant ar réson n'en din qet a enep dit
Me voar ervat n'am bo qen partach digant va zud da vont qui
An hini en deus dastumet pévar, pemp cant scoet leve,
N'on deuz quen evit heritac'h pa guitaj aneze.

Finissomp hor c'homplimanchou, sonjomp e rancomp mervel
- Ha tachomp d'en em prepari abars ma deuser d'hon guerrel
Goulenomp pardon eus Doue, hac eus hor mam ar Werc'ha
Ha goude ar fin eus hor buez, mont oll er barados.